



## CANTIC SPIRITUEL

*Var sujet ar Brinces Judith, peini  
a zibennas Holofernes, Roue an  
Egypt, dirac kær Bethuli.*

*Var ton Santez Genovesa.*

**P**ELL bras šo em boa hét esper  
Da implija lod va amzer  
Da ober ur C'hantiq breton,  
Agreabl da bobl àr c'hanton.

Rac se e meus sonjet ersin  
E vije util d'am dessin  
Tréi a c'hallec e brezonec  
Un Histor gaer a meus cavet.

Speret Divin hac adorabl,  
Bezit em andret favorabl;  
Guerc'hes santel, va sicouret  
Da zisclérya d'ar Vretonet.

Glêvet oc'h eus comz alies  
Eus ar Rone, Holofernes;  
Un den cruel e voa meurbet,  
Gant ur plac'h e voe dibennet.



Sonjal' eure dre e buissanç  
Ober d'ar bobl en assuranç  
E adori évit Roué;  
Ha memes evit o Doue.

Mes ar bobl eus ja Israël,  
O veza da Zoué fidel,  
Ne felle qet dezó sujr,  
Ma clasqas dont d'o zistruji:

Prepari eure un arme,  
Ma voa General várneze,  
En esper dont d'o massactri  
Dirac ar guér a Vethuli.

Ar bobl-mâ, fidel d'ò Doue,  
A brepar iwe un arme  
Évit sonjal en em disen  
Rac aoun demeus o bourrevien.

Ur Brinces gaer, hanyet Judith,  
O veza e qær Bethuli,  
A laqas choas da Gommendant  
Alchior, dre m'oa den vaillant.

Laqet e voe da Goronal,  
Var aîme Israël voa General;  
Petra benac n'oa qet Christen,  
En devoa joa ous o lezep.

Me ho lèz da gonsideri  
Ar valiç hac ar jaloui  
En doa Holofernes ar Roué.

**Pa vel préparet e armé.**

Dont a eure e-unan da c'houlen  
Ha c'hoant o doa d'en ein difen ;  
Petric voa o lezen hac o Doué,  
Pa n'oboissent d'ar Roue.

Alchior dezàn a respontas  
Ar bobl-mâ o deus ur feiz vrás ;  
O Doue a so oll-buissant,  
Ha Rque eus ar firmamant.

E buissanç a so qer bras,  
Ma sicour ar bobl dre e c'hraç ;  
Hep dale e teuint d'ho ranversi ;  
Mar teuit da glasq o forci.

*Holofernes.*

Te gomz evel un insolant ;  
Me rai dre ur gombat sanglant  
Dêvi ar guêr a Vethuli ,  
Ha qement den a so enni.

Abars pemp devez hac hirib ,  
Mar bez beo , te sut a velo  
Qun brassoc'h evit o Doue ;  
M'o lazo tout abars heuzet .

*Alchior.*

Allas ! pobl paour , mervel so ret ,  
Holofernes a so fachet ;  
En em laquit en bréson  
Da betti Doue a vir galon .

D'o zitour d'allout resista  
 En ur gombat evel houma :  
 Bras ha bian e ranquer merveil,  
 Nicun n'en devezo qarter.

*Judith.*

Va Doue, leun a vadelez,  
 C'houi è hon Roué puissant iveauz ;  
 Ho pezit sourei ac hanomp,  
 He qemerit truez ouzomp.

Na souffrit qet, ô va Doue !  
 Ve ur maleurus a zeufe  
 A benn da derri ho lezen  
 Ha dà zistruch ar Gristenien.

Grit ma vezint oll punisset  
 Evel an Egyptianet,  
 Dre ho justic hac bo rigueur,  
 Ha distroit ho pobl dious peb maleur.

Ha possabl ve, ô va Doue !  
 Ve ur miserabl a deufe  
 Da brofani hoc'h Ilisou,  
 Elec'h ma reomp hor pedennou !

Roit deo ur bunion,  
 Pa zint qen cruel, qen dirèson ;  
 Grit ma ligoro an douar crenn  
 D'o lounqa e puñc an ifern.

Qen superb eo ar C'horonel,  
 Ma zeo leun a c'hoad criminel,

Hac e sonch hep hoc'h asistang  
D'honi laza tout nep repetanç.

En è neñz ma e esperanç ;  
Mes c'houï, Doue, dre ho puissanc  
Hac ho craç a ell hon souten,  
Ma vezimp fidèl d'ho lezen.

O sortial eus e repas,  
Permetit, va Doue, dre ho craç,  
Pa zeui ar guïn d'en antetï,  
Ec'h alsen dont d'e zistruji.

Grit ma teuin da veza trec'h,  
Daoust peguen fèbl e ve va brec'b,  
Da drêc'hi e benn d'ar monstr-se,  
A-fell dezàn beza Doue.

Roit din-me ar gourrach-se,  
Ha laquit em guidou ive  
Comzou qen douç ha qen charmant,  
M'en dedeyin en un instant.

Hep offanç d'am virginité,  
Permetit ma ria va antre,  
Ma ellin, pa vezo cousqet,  
Trêc'hi penn ar monstr inilliguet.

Evit ma viot anavezet  
Evit Doue partout dre'r bed,  
Roue puissant ha General,  
Crouer an ên hac an douar.

Va flac'h, ro din va boquedou,  
Va farfum, va fandoreillou,

Va habit caer leun a berlez,  
Ma zin da zaludi Holofernes.

Laqit prest en ur valizep  
Peadra da veva ur zizun.  
Ebars er c'han gant ap arme,  
Me rai ar zalud d'ar Roue.

Leqomp en Doue hoñ fizianç,  
M'or c'hunduo dre e btovidanç;  
Ne refus e c'hraç da hini,  
Pa zeuer gant sez d'e adori.

Me ho ped, pobl a Israël,  
Mar doc'h en ho lezen fidel,  
Da c'houlen sicour digantän  
Da resista er gombat-màn.

En em liquit en orêson,  
Pedit Doue a vir galon,  
Evit ma viipp victorius  
Vat Holofernes maleurus.

Eliakim, Roue santel,  
C'houi oll, Béleyen Israël,  
Gant courach en em gonsolit,  
Hac evidomp-ni oll pedit.

Ur veach terrupl a antreprenan,  
Evit an oll e partian;  
Deoc'h tout e lavaran adie,  
En em laqit dirac Doue.

*Ar Véleyen.*

**Mont a reomp gant ur voez huel**

7  
Da bedi an Tad Èternel  
D'ho conservi dious drouc-speret  
Er veach oc'h eus antreprenet.

Ho pet sonch ac'hanomp bepret,  
Rac tost eo an enemiet;  
Judith, ho pet calz a sourci,  
Allas ! prest voar da gombati.

*Santinel an Enemiet.*

Pelêc'h e zit, Princes yaouanq ?  
Ho qenet a so ravissant;  
Perac ta en em exposi  
Da gaout qemant all a sourci ?  
Chom allac'h e paciantet,  
Esperi ho poan hac hò yec'het,  
Evelse n'eip brecipiñit  
Livirit din petra glisquit.

*Judith.*

En em récour a meus sonjet;  
Qen terrubl e zon gourdrouset,  
Mar clasq ar bobl oc'h insulti,  
Me fell din-n'em sovetai.

Me a garfe, hep drouc ebet,  
Caout an enor, mar permetet,  
Da barlant ous 'ho Coronal  
Holoferpes, Roue, Général

*Ar Zoudardet.*

Ni a yelo d'ho cundai,

Princes, oll gant hor mousqedî,  
Hac ho rento hep drouc ebet  
Bete'r C'horonal assuret.

*Judith.*

Roue puissant Holofernes,  
Rampart an oll binyidiguez,  
Me garre em be, emezi,  
Ur guinou aour vit ho meuli.

Eus ho Majeste' an eclat  
A ra din mont qen agreabl,  
Monet a ran var va daoulin  
Dirac ho Majeste' divin.

*Holofernes.*

Princes, deut d'en em assuri;  
Me ho pêd, na grenit mui:  
Ho qenet e deus va charmet  
En instant ma meus ho quelet.

Va daoulagad ha va c'halon  
Zo en em ravisset qen don:  
Savit prontamant en ho sa,  
Me eo, emeza, a dle soubla.

Judith, contit din ar sujet  
P'evit tra oc'h amâr deuet;  
Ha mar deus poan var ho speret,  
Certen e viat delivret.

Va c'haloh so e captivite,  
C'houi ell e denna ac'hane:

Netra tout deoc'h na refusin,  
Ma accordit ar c'hraç-se dîñ.

*Judith.*

D'ar famin e zint reduiset,  
Eva reont goad an anevalet;  
Va zicour allen deoc'h presta  
Evit donet da resista.

*Holofernes.*

Princes, cetu-me tout charmet  
Dre'n eloqanç eus ho quelet,  
Nemeus sonch nemet ac'hanc'h,  
Va oll fizianç a zo ennoc'h.

A bep hent oc'h eus desarmet  
Holofernes, Roue an Egyptet;  
Me ro deoc'h graçou souveren,  
Commandit c'houi hivisiqen.

*Judith.*

Ma permetit, dre ho madelez,  
E chomin gant va zervicheres  
Da veva herve va lezen,  
Yac'hoc'h calz en em gomporten.

Mont a rin partout da vale  
Dre ar vro hac ar c'hontre;  
Mar em lezit en liberte,  
Me a bedo bepret Doue.

*Holofernes.*

Princes, noc'h eus nemet pourmen,

En em gundaiſt érves ho lezen ;  
 It̄ da vale dre va arme ,  
 Me ho recommando, deze.

Nep rai droug d'êch , m'o funisso ,  
 Rac souden ez int d'ar maro  
 Nep a guemero effronteri  
 E nep fêçon d'oc'h insulti.

Deut da velet va zenzoriou ,  
 Va aour ha va oll finançou ;  
 Dec'hu int , mar qirit iveau ,  
 Ma ne senchit a volontez.

Me ya da dressa ur reqet ,  
 Ma valeot elec'h ma queret ;  
 Mont a ran d'ho recommandi ,  
 Ma teui va soñ d'och enori.

Vagao , prepar eur banquet  
 Evit ma teuo d'am guelet  
 Ar pennou bras eus va arme ,  
 C'hoant bras a meus da gomz ouje.

Me a esper dre da gaqet  
 Judith a dle beza charmet ;  
 Qe buan da laret dezi  
 Dont fennos da goannia d'am zy.

### Vagao.

Princes , c'houi oc'h eus genezez ;  
 Graç vad ar Rote assuret ;  
 Betec bremâ oc'h eus guelet  
 Ap amitie en deus bepret.

11  
Deoc'h netra ne al da refus ;  
Var e zanyes oe'h ar vestres ;  
Digasset on d'ho suplia  
Da zont senpos dy da goapia.

*Judith.*

Autrou , me ypar em c'hemerit  
Dreist va enor ha ya merit ;  
Mont a ran ganec'h assambles  
Da veza d'ho Mestr servicheres.

Un enor bras memes è din  
Servicha ur Mestr so quer din ;  
Ur Roue qen douç , quer charmant ,  
Quer puissant ha quer yaillant .

*Judith hac Holofernes.*

Princ , ya Mestr , na veritan quer  
Beza ous ho tol receyet :  
Mes sclér e velan ho calon  
Carguet evidon a affection.

Hep compliment ec'h azean  
En ho qichen sur e tostan ,  
Evit contanti ho speret ,  
Ha renta d'an oll joaustet.

*Holofernes.*

Plijadur bras a guemeran  
Ous ho quelet em c'hichen bremar ;  
A c'hraçou bras em oblijet ,  
Va c'halon zo rejoisisset.

Dibrit, evit, herves ho cout,  
 Me servich deoc'h a bep fra tout;  
 Rac me hac ar goimpagnunes  
 A so charniel ganeoc'h, Princes.

Arabat eo ober compliquant,  
 En ur fest so qen excelant;  
 Yac'h, dispos, dibrit hac esit,  
 Evit sur erfin e sonjit.

*Judith.*

Va Frinç, va Autrou, accordit din  
 Ar c'hraç na davin qet ho cuïn  
 En ur fest a so qen charmant,  
 Qen caer ha qen rejouissant.

*Holofernes.*

Me ya da eva d'ho yec'het  
 Assambles gant va mignonet;  
 Gant joa vras ha rejouissanc,  
 Ravisset omp en assuranc.

*Judith.*

Vagao, an amzer so defiet,  
 Poent eo cass ho mestr da gousqet;  
 Goloit-en gant e lincelliou,  
 Hac hon lezit amâ hon daou.

Roit din ar c'hraç, va Done,  
 Hac an nerz d'am breach' iwe,  
 Mellin gant ur goutelacen  
 Dont da drêchi d'ar monstr e benn.

Evelse o pedi Doue,  
 Judith o tostat oc'h e vele,  
 Gant un tol he deus dibennet  
 Ar monstr evel ur milliguet.

Servicheres , tosta amâ ,  
 Ne c'heus asser mui da grenâ ,  
 Dal ar pen-mâ evit cuzet ,  
 Lezomp ar princ-mâ da gousqet.

Doue ra vezò trugareqet ,  
 Ar vec'h-mâ e zomp delivret ;  
 Partia ellomp hep spont ebet ,  
 Ar passach zo deomp permetet.

Va breudeur , deomp-ni digoret ,  
 Doue en deus hon delivret ;  
 Admiromp eta e vertus  
 En deus disqet din an andret.

Doue en dêveus permetet .  
 Dre zorn ur plac'h dister meurbet  
 Dont da zibetna ur geant  
 A sonje beza oll-buissant.

Doue dre e zaouarn puissant  
 En deus grêt din beza contant :  
 Holofernes so bet Jazêt :  
 Cetu amâ e benn da velet.

Evit test e c'halyvân an ên ,  
 Qun sortiet pur ac'hane ;  
 Va El-mad én deus va miret  
 Qen pur vel ma zoao antreet.

Gant solgn en deus vā c'hünduec  
 Injur ebet n'ameus souffret ;  
 Reqtomp dezân hon énoriou,  
 Gloar ha pep seurt meuleudiou.

*Judith.*

Alchior, ha te a ene  
 Pen Holofernes ar Roue ?  
 Cetu-en en aze o tiouada,  
 Hag e gorf commâncet dà vreinâ.

Alchior, en em c'hra christen ;  
 Hac en em soumet d'hon lezen,  
 Na ve c'hoarvout a rae ganes  
 Evel gant Roue Holofernes.

*Alchior.*

Judith, a greis vā c'halon  
 Me a gred e Toue gouition ;  
 Me zo prest d'en em soumeti  
 Qercoulz ha c'houi d'e adôri.

Me gred e Dôue éternel  
 Hac én ar mestr universet ;  
 Contant ouñ da vêza christen ;  
 Joa bras a meus ous e lezen.

*Judith.*

Deomp var an enemiet,  
 Ma vo ar victor achuet,  
 Cousquet int oll brema dija,  
 Sonit an drompiss d'ô difuna.

Greomp seblant d'o c'hombati,  
 Evit caout leach' d'o choqi;  
 Rac pa velint ar gontel-mâ  
 Leun a c'hoad, e teuint da sponte.

Pa e guélo ar soudardet;  
 An arme vezò derouet:  
 Sonit ar gombat, trompillou,  
 Ma zai'r soudardet d'o fostou.

### *Ar Santinal.*

Vagao, it da zifuha.  
 Ar General, contit dézâ  
 E ranger bremâ combati  
 Ous an arme a Vethuli.

Lavarit dezân difuna;  
 Ar gardou aroc a dosta:  
 Ne fot nemet e gommmandamant  
 Da livra ur gombat sanglant.

### *Vagao.*

Va C'horonal, pront disanet;  
 Commandç ar gombat a so prest;  
 An enemiet so deut yarñomp,  
 Hac a ra goab eus ac'hanomp.

Ema'r maleur so éruet  
 En nos-mâ sur, va mignonet:  
 Hor General so dibenñet  
 Dre he linessa gant Judith.  
 Collet omp tout, ret eo tec'het;

**Pa zeo hor C'horonal dibennet :**  
**Tec'homp dious Doue Israël ,**  
**A ra deomp ur glac'har mortel.**

*Ar Pontifet hac dr Kéleyen a Vethuli.*

**Criomp buez bir da Jûdith ,**  
**Buez hor brinces fur ha parset ,**  
**Ha nerz d'he brech victorius ,**  
**Pe dre hini Doue zo glorius.**

**Canit oll gloar Jerusalem ,**  
**D'ar brinces Judith , peb christen ,**  
**E deus lazet un d'en cruel ,**  
**Evit delivra bobl Israël.**

**Deomp d'an ilis tout assamblee ,**  
**Da gana canticou neves ,**  
**Evit meuli e vajeste ,**  
**Ha dont da veuli hon Doue.**

**Offromp hor c'halon da Zote ,**  
**Hor c'horf , hor speret , hon ene ,**  
**Pa vezo'r buez finisset ,**  
**M'on recevo er joäüstet.**

**F I N.**

---

**E MONTROULEZ , e ti LÉDAN.**